

A-c'houde 30 vlez àr un ton laouen, àr blasenn Guérin

Bep blez a-c'houde 1989 e vez treuzfurmet tri devezh-pad plasenn Guérin, e Brest, en ur dachenn arvestiñ sevenadurel ha poblek : *La foire aux croûtes* ("foar ar c'hatarennoù"). Bravat anv, ne gav ket deoc'h ? Son ar gouel a vez klevet doc'htu pa vez distaget. Ha petra eo ar foar-se ? Ec'h an da respont ! 'Rit ket bil !



Ur fest sevenadurel ha poblek àr un dro, *La foire aux croûtes* a vez lidet abaoe tregont vlez àr blasenn Guérin, e Brest. Ul levr zo bet savet er blez-mañ evit kontiñ istoer ar festival dibar-se get an embannadurioù Plage Guérin.

© Jacques Balcon

ar foar a oa bet aozet evit ar wezh kentañ 30 vlez zo get ur skipailh ha na ouie ket er mare-se pegen brudet e tahe da vout an afer evit Brestiz ha Breizhiz. Hrevez Bernard Louedeg e oa bet aozet ur gouel bras evit lidiñ kant vlez ar skol Guérin e 1987, get sikour kengor ar gouelioù. Krouet e oa bet ur gevredigezh arall : *Plage Guérin*. Buan a-walc'h e oa daet ivez Ar Vro Bagan hag ur gazetenn a oa bet krouet, La page Guérin... Ganet e oa *La foire aux croûtes* diwar an holl draoù-se. Ar pal d'ar c'houlz-se a oa derc'hel ur sizhuniad gouel hag a loc'h get ar c'hermes hag a gloz get gouel ar sonerezh. Aozañ darvoudoù sevenadurel get c'hoariva ha dañs a oa soñj an dud.

➔ HAG AR LIVADURIOÙ ER JEU-SE ?

Er mare-se e oa ur bern livourion a vicher pe amateur e Sant-Varzhin (karter plasenn Guérin). Ur vuhez sevenadurel ha poblek a oa eno dija en arbenn ag ur lec'h hogozik istorel, un ostaleri hag a zo daet da vout ti un dorloer-eskern hiriv : *An*

Triskell Bar, lec'h ganedigezh ar foar. Un triskell a chom er blasenn Guérin ur sort, unan bihanoc'h avat. Erfin, pell ec'h omp doc'h hor c'hazeg. Tri devezh pont Yaou Bask get diskouezadegoù, ur babell hag un ostaleri (ha n'eo ket chañchet re). Berzh en doa graet er c'harter, bugale é c'hoari e pep lec'h hag é kemer perzh er "pod-lastez livet ar gwellañ"... Ur c'harter lan a vuhez (get tud lan o c'hof un tamm, ivez met un afer arall eo...). Chañchet zo traoù a-c'houde èlkent. Aozet ha prientet e vez ar gouel bep blez gant hogozik kant den. Kant plas zo evit ar re o deus c'hoant da ziskouez o oberennoù (tennadenn d'ar blouzenn-verr a vez graet bep blez a-gaoz d'an 300 a dud a faot dezhe en em ziskouez).

➔ HIRIV AN DEIZ HAG AN AMZER-DA-ZONT

Ag an 30 a viz Mae betek ar 1^{añ} a viz Mezheven 2019 e oa bet an 30^{vet} foar. Un digarez e oa da embann ur levr ispisial a-zivout istor plasenn Guérin ha karter Sant-Varzhin, istor poblek ar c'harter hag ar foar, skeudennoù graet blezadòu zo er

foaroù paseet... Hiriv eo chañchet an afer un tammig ; kalz a ostalerioù zo tro-dro (*Le Triskell Bihan, Le Café de la plage, Le Mouton à cinq pattes, Les pissenlits, Le Bouche à Oreille, l'Atelier Gourmand...*), ur gwir vuhez a-hed ar blez ha kevredigezhioù arall zo bremañ : ur saloñs embann a vez aozet bep blez da skouer, ur marc'had e-tal ar blasenn ha me 'ouia-me. Un ti-karter emveret zo a-c'houde daou vlez ivez, *L'avenir* e anv. Ur forn vara zo ha c'hoarioù, prantadoù trok, predoù *barbecue*, sonadegoù ha festoù-noz a vez aozet...

An holl draoù-se a vez graet get tud ar c'harter peotramant get tud hag a vourr ar lec'h-se ha tan enne da lakaat birvilh. Eskemmoù a vez etre ar re yaouank hag ar re goshoc'h ivez... Razh an traoù-se a lak Bernard Louedeg hag ar re arall da lâret e vehe marse ar wech diwezhañ dezhe aozañ ar foar. Mat eo ar jeu bremañ ha marse eo poent lakaat ar re arall d'ober o zraoù ivez get ar foar... Kenavo a-benn blez neuze, perchañs !

Dorian Clerbois

Evit gouiet hiroc'h : www.foireauxcroutes.com